

# GUERZ AR MARO.

*Var an ton ordinal.*

**P**ost stag'et ouc'h ar bed, c'hui a glasq ho plijadur,  
A gorf hac a speret, c'hui en em ro d'ho natur:  
Ne sonjit qet er fin ur vech eo ret mervel,  
Qen na vez fin ho puez, ha prest Douc d'o qervel.

Seag'et en ho calon gant chaden an drouc-speret,  
Siouas, ouc'h ho madou, pe gant reze oc'h dallet,  
Hac a veng en ho speret ar souch eus ar maro,  
Pehini so un affer an netessera so.

Ret eo deomp credi ar pes a velomp aznat,  
E ranqomp oll mervel. pe abret, pe divezat,  
Pe en hor yaouanqis, pe en oad a gosni,  
E ranqimp paea'n tribut d'ar maro pa zui.

Ne ouzomp nac an heur, nac ar plac, nac ar moman,  
Ma tui ar Maro criz d'or surpreh en un instant:  
Divezat vezo deomp dont neuse da nec'hi,  
An amzer dremenet biqen ne zistroi mui.

Spac a fello neuse d'ar bec'berrien obstinet,  
Digares pinijen, da qen ruzita er pec'het,



Mes spaç na vero qet pelloc'h d'e gontinui :  
Na paz memes da ellout ar vuez exerci.

Rac-se bezit fidel, o tont d'en em brepari,  
Rac aon ne vec'h cavet en ur stad a zieg'i ;  
Bez'e credit certen e tleit beva pell,  
Ha marteze en nos-mâ, et renqot-hu mervel.

Bez'e credit ive n'ouffac'h qet beza cöllet,  
Dre'n abec ma qerzit dre an hent darempredet,  
Ha marteze fenos ar maro cris ho stringo  
E gouelet punç an Ifern evit dêvi eno.

Ar pes a so certen, er stat ma vlot cavet,  
Pa zui ar Maro yen d'o d'istroada eus ar bed,  
E chomot birviquen, evurus, mar bec'h mad,  
Ha mil guech maleurus mar bezit en goall stad,

Deomp eta a speret er garneliou da velet  
An esqern eus an dud on eus bet anavezot,  
Bez'int bet var an douar eveldomp o ruilla,  
Allas ! ni vezo ganto pa sonchimp nebeuta.

Cals a zent eus an ên a so bet var ar bed-mâ  
Pec'hertien baour ive evel ar-re so bremâ,  
Mes pa zint deut da sonjal ne doant qet en ho bro,  
Int en em santifiet dre'r sonch eus ar Maro.

Greomp oll evel-to, quitaomp ar pec'het marvel,  
Renonçomp c'hoas ive da bep pec'het veniel,  
Sonjomp bepret er Maro hac en Eternite,

Hac e vezimp sur ato en guir doujanç Doue.

O Jesus, va Zalver, me zant ezon faziet;  
 Allas! dallet oun bet gant ar bed an drouc-speret;  
 Hog'en bremâ me bromet, gant bo craç, va Doue,  
 Da gommanç à fêçon vad hent an Eternite.

Hac en deiz, hac en nos, me a sonjo er Maro,  
 Evit en em zispos, ina vezin prest d'e receo;  
 Rac aon ne ven surprenet er stad eus ar pec'het,  
 Ha neuse sious collet, deffot beza sonjet.

Renonç a ran d'ar bed ha d'e blijadurezou,  
 Renonç a ran a gren d'e c'hoall accustomançou;  
 Adieu eta d'am c'herent, adieu d'am mignonet,  
 Ret eo sonjal er Maro ha, renonç d'ar pec'het.

Adieu plijadurez eus a gorf hac a speret,  
 D'ar bez on condaonet evit mezut ar prevet:  
 Nep-tra ne rai va sonch nemet ar binijen,  
 Hones vezo va fartach, va joa hiviziqen.



## GUERZ AR VARN.

*Var ton Guertz an Tad Maer.*

**S**ELAOUIT oll, Christenien, clêvit bian ha bras,  
 Un avis a beurs Jesus, a eur gonseqanç vras:  
 Erru ar Varn General, hac an Eternite,  
 Souden vezo goulennet cont digant oc'h ene.

Rac-se en em breparit, laqit urz en pep-tra,  
 Rac-aon ne vec'h surprenet pa sonjot nebeuta,  
 Disposit ho testament, hac ho confession,  
 Ar glac'har en ho calon, eur barfet contricion.

N'en deus den var an douar a alfe lavaret  
 An encres hac ar glae'har a vezo dre ar bed  
 Pa renqot guitibunan mervel ha qimiada,  
 Ha mont da veza barnet da draouyen Josapha.

An Antecrist millig'et a zui ebars er bed  
 Abars, meur a vlaveziou e vezo sur guelet,  
 Abeurs an ifern memes e vezo digacet,  
 Maleur da nep er c'hredo, sur e vezint collet.

Dre vertu an drouc-speret e vezo transportet,  
 Evit prezec ul lezen gant Doue condaonet:  
 Mes dont a rai daqu brofet abeurs Salver ar bed,  
 Nep a heulio o lezen a vezo sovetet.

Estranch e vezo neuse sellet ouc'h ar mor glas,  
 Pehini en em savo dreist ar menezieu bras:  
 Al loenet mud er c'hoajou qer terrubl a yudo,  
 Stravillet vezo neuze an hini o c'hlevo.

Crena a rai an douar, ma trubuilho an den  
 Pa velo ar menezieu o ranna gant anqen;  
 Ar c'hèriou hac ar c'hèstel a vezo discaret;  
 Ar reyer en em fraillo partout sur dre ar bed.

Sortial a rai neuze ar bupl a yoa ouzet

Er c'havernou en douar gant spont e voant tec'het :  
 Beza en em rancontrini, mes hep en em barlant,  
 Evel pa vent alteret, pe collet o sqiant.

An eol a vezo neuse collet e sclêrijen,  
 Al loar goloët a c'hoad hac a devalijen :  
 Eus ar firmamant neuse e couezo ar stered.  
 Curun a vezo terrubl dre bêvar c'horn ar bed.

Ar perzier eus an êvou a vezo digoret  
 Evit lança an tan foeltr dre bevar c'horn ar bed :  
 Truez a vezo neuse eus ar bopl affijet,  
 Ne ouezint pelloc'h tec'het, oll e vezint devet.

Piou a ouffe explica peg'ement a c'hlac'har,  
 A vezo neuse siouas partout var an donar :  
 An oll a renço mervel, ha prest resuscita,  
 Evit beza presantet e traouyen Josapha.

Neuse e tui an zles da zon an trompillou,  
 Evit g'ervel ar c'horfou da sevel eus o beziou,  
 Eus ar Purgator memes e tui an eneoù,  
 Hac ive eus an Ifern da gaouet ho c'horfou.

Honnes vezo ar glac'har da ur c'horf millig'et,  
 Pa glêvo gant o ene penos czeo daonet :  
 Rebechou bras a vezo entrezo birvigen,  
 Abalamour d'o maleur, ha siouas d'o anqen.

Deus ganer, corf maleuruz, eme'n eue daonee,  
 Te se quicoc d'am maleur dre da vuez collet :

Deus da glêvet da setañ assambles ganeme,  
Eno vezi assuret out daonet couls ha me.

Hog'en an ene eurus a zeu gant joüisdet  
Da anonç d'e c'horf santel e vezo sur salvet;  
Hones a vezo ar joa hac ar gontantamant,  
Da veza mortifiet er bed e pemp sqiant.

Deus ganén, corf benign'et, da veuli an Drindet,  
Pehini dre drugares en deus or pardonet:  
Deus da glêvet hor Barner o prononç an arret,  
Ha goude ni a yêlo d'ar gloar deom preparer.

Selaouit moues an æles, an trompillou santel  
O c'hervel guitibunan ar bopl universel:  
Da vont dar Varn General oc'h galvet gant an æl,  
Eno vezo prononcet setañou eternal.

An amzer a drugares, siouas so tremenet,  
Hac an hini a justiç so brema erruet;  
Ne deus mui a alvocat da bedi evit den,  
El léc'h ma couez ar vezen e chomo birviquen.

Setu erru ar Barner, ho Salver leun a c'hloar,  
Var ur gounabren gaer e tisquen d'an douar,  
E faç qer leun a c'hloar hac eus a vajestes,  
Ma cren memes diraza, ar zent hac an ælez.

Setu erru ar Verc'hes, Mam da Zalver ar bed,  
Hac an daouzec abostol, ar zent ha sentezet,  
Erru int gant Jesus-Christ en ur gompagnunes,

Evit bara ar bec'herien, ganta oll assambles.

Al levr eus hor c'houstianç a vezo digoret,  
 Pelec'h e vezo gulet qement-tra hon eus gret:  
 An drouc-speret a grio : Justiç, Barneur fidel,  
 Ouzon-me ec'h aparchant oll ar re griminel.

Neuse ar Verc'hes Vari ne lavaro netra,  
 Justiç he Mab adorabl a varno var bep-tra:  
 N'en deus mui a alvocat da souten ar pec'heur,  
 Barnet vezo peb unan gant Justiç ha rigneur.

Setu ar Barneur leal o prononç ar setanç,  
 Selaouit quitibunan e rei an odianç:  
 Eus an tu deo e tistro, gant ur zel truezus,  
 Evit anonç o setanç d'an eneoù eurus.

Deut c'hui, pere so caret gant va Zad Eternel,  
 Da bossedi ar c'hloar a vezo immortel:  
 Hones a vezo ar joa, mont da veuli Doue,  
 En compagnunes ar zent, hed un Eternite.

Neuse tristroi ar Barneur ouc'h an eneoù daonet,  
 E faç qer leun a gloar, ma vezint stravillet:  
 It brêma, tud millig'et, d'an ifern gant Satan,  
 Epad un eternite, evit lesqi en tan.

Eur gouventen anflammét neuse o destumo,  
 An douar a zigoro en instant dindanno:  
 Honnes vezo ar glae'har, ar c'hri hac an hirvoud,  
 An arrach, an dizesper, setu y en Ifern tout.

Retourn a sa hor Zalver gant e Vam benig'et,  
 Gant an ebesset santel, ar zent, ar zentret,  
 An'eneot evirus, an zles anflammet,  
 Evit meuli da james an Drindet beoig'et.

Mar fell dec'h beza neuse en tu deo d'hor Zalver,  
 Pratiqit ar vettuziou, an dra' oc'h eus amrez;  
 Observit lezeñ Doue, renoncit d'ar pec'het,  
 Me bromet gant assurang e viot ep mar salvet.

FIN.




---

À MONTROULEZ, chez a Imprimerie LEDAN.